

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

3. KLOAREK LAMBOL pe MARKIZ GWERRAND

Kloarek Lambol a vonjoure
 e ti 'r C'halve koz pa errue:
 - Na bonjour ha joa en ti man
 Fiekra Galve pe leac'h eman ?
 - Nag ema duze er gampr venn
 nag o tiluia he bleo melen.
 Kloarek Lambol pen deuz klevet
 gant an diri e/ bet pignet.
 - Bonjour dehoc'h Fiekra Galve
 ha c'houi deufe dal leur neve ?
 - Na d'al leur neve ne dinn ket
 gant ar markiz wenn^o gourdrouzet. ° Kompren: ven
 - Gourdrouz ar markiz pezh a garo
 na dal leur neve ni a ielo.

 Na markiz guerrand a c'houlenne
 digant ann hostizez eno neuze !
 - hostizez, din me leveret
 hag ar c'hloarek hoc'h euz gwelet:
 - Ia, aotrou, tremenet eo dre aze
 Fiekra Galve oc'h he goste.
 Ann aotrou markiz pen deuz klevet
 eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet,
 eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet
 ha dal leur neve ez eo eet.
 - Tud al leur neve, din leveret
 hag ar c'hloarek hoc'h euz gwelet
 - Ema e traon al leur o tansal
 ha ganthan ann hini a gar.
 Ann aotrou markiz pen deuz klevet
 eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet,
 eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet
 hag e traon al leur ez eo eet.

 - Kloarek, demp hon daou war ar gajou
 daou vaout zo ha tri re vanegou
 ha ma c'hounez te anezho
 araok neuze c'hoari vezo.
 - Aotrou, c'houi zo digentil a Verrand
 ha me zo map eur paisant.
 - Te oar dibab ar merc'hed koant.
 Memeuz eur c'hleve hirr ha moan,
 Kloarek, a drouc'ho did da ruban.

- 16 -

- Aotrou, memeuz eur vazik a zaou benn
 a zo he c'hreiz d'ho kourc'hemenn.
 ann aotrou Markiz pen deuz klevet
 enn eur sut arc'hant en deuz c'houezet,
 enn eur sut arc'hant en deuz c'houezet
 triouac'h digentil zo en em gavet.

 Kriz ar galon ma na ouelje
 nag el leur neve neb a vije
 o welet al leur o ruia
 gant goad ar c'hloarek o skuilla.
 Fiekra Galve pe deuz gwelet
 e bleo ar markiz eo bet lammet
 e bleo ar markiz eo bet lammet
 teir zro dal leur ganthan deuz gret.
 - Evidoud da veza lazet ar c'hloarek
 ne vi ket well euz va gwerc'hded.

 Fiekra Galve a lavare
 nag er gear d'he mamm pa errue:
 - Va mamm, grit va gwele buan
 birviken anezhan ne zavan,
 birviken anezhan ne zavan
 pazeo maro an hini a garann.

 (Kloarek Lambaul a zo bet embannet gant Milin e Bulletin
 de la Société Académique de Brest, tome 4, 1864-65, p. 98-
 104)